

E KOUN DA NARSIS QUELLIEN

Dibab Gwerziou

Bleuniou kutuillet en e liorz vuzudus
evit kempenni ar menhir dister
savet evitan gant e geveillen

E PARIS

1912

L'annuaire de l'inauguration du
monument à Narcisse Gwerziou
à La Roche Durrin

le 8^{me} 1912

Dibab Gwerziou

E KOUN DA NARSIS QUELLIEN

Dibab Gwerziou

Bleunioù kutuillet en e liorz vuzudus
evit kempenni ar menhir dister
savet evitan gant e geveillen

E PARIS
1912

ANNAIK

Pa oann e ker ar Roc'h,
Iaouank ha leun a loc'h,
E ker ar Roc'h,

Anaenn diou verc'h gaer
Unan 'vel ar roz-aer,
Diou verc'hik kaer,

Ann hini iaouanka
Koantoc'h 'vid ar c'hoanta
Ar iaouanka

Naik, eunn heiez flour
Er c'hoajo, traou ann dour,
Eunn heiez flour.

Etre ar verc'hed kez,
Pa c'he ho mamm emez,
D'ar verc'hed kez,

Me lenne eul levr brao
Etre ann eligo
Eul levrig brao :

— Danve mab ar Roue
Hag he goantiz ive,
Mab kaer 'r Roue

Muntret er garrek korn,
Int kousket dorn ha dorn
Er garrek korn. —

Hag a oelemp neuze ;
Annaik marteze,
Hi na oele ;

Sonj am euz a savaz,
Ha d'ann nec'h a bignaz
Kerkent savaz :

Ar glujar nij d'ar c'hoat
Pa ve gwallet ervad,
A guz er c'hoat,

Lec'h dont tu 'r chaseer
Evit mervel e-berr
Tu 'r chaseer.

Er Roc'h, pa oann iaouank
C'hoarzenn ha goelenn stank
Pa oann iaouank.

PARDON SANT-TREVEUR

I

Ran-tan-plan, ran-tan-plan. — Tud vad
Adalek ar Roc'h bete Prat,

Euz a beurz ann otrone veur,
Disul 'man pardon Sant-Trevezur ;

C'hoari e pep doare 'vo gret
Nemet gourenno n'a vo ket,

Er bla-man n'a vo gourenno.
Ze lak lac'hadek 'barz ar vro. —

Evelse ann tabouliner
'Embanne e Roc'h d'ar gwener ;

Hag o vouse'hoarzin er marc'had
Ar meziad a re sarr-lagad.

Ar zul warlerc'h heol splann velkent
Ha tud hag heol eleiz ann hent;

Dre ar prajo oar ar c'hlazen
Merc'hed, potred hag arserien;

Ha c'hoari-vaz dre ar prajo,
M'hen lavar, nemet gourenno;

Ha d'ar jabadao gand ar foultr
Deuent endro evel ar poultr:

Ken 'oa mezo al lamperien,
Ar biniou pe he berc'hen.

Euz a Sant-Trevez daou a daou
Distroent gand bleunio argaou:

Bleunio han ouz ho zavancher
Hag enn ho c'halon ar gevier;

Berroc'h 'vid ar bleunio, potred,
'Bado karante ar merc'hed.

II

Potr ar gward goulenne eberr
Toët d'ann Ti-Poaz digand eur c'houer:

— Ar maout-se pelec'h fell d'id kas
Ouz he gernio ru-gwenn-ha-glaz. —

Evid eunn eured vo ret kaout
Da bred warc'hoaz eur gaer a vaout. —

— Da loenik n'a ket d'ann eured,
Da leur 'r pardon na larann ket. —

Da leur 'r pardon an marteze
Ha mar herez dont oeli ze. —

O tifourka da Sant-Trevez
Eunn dinel oa endro d'al leur,

Ha pevar dantad tan ouspen
'Pevar du d'ar gourennerien.

Hou-hou, eme ar c'houer oar ged
Hou-hou evel ar Chouanted:

Ha pa digorjont ann dinel
Oar benn potr ar gward eunn ninsel;

Epad ar c'hanno ann den kez
Uz d'ar gistr oar he goaze rez

Na klevet a re na gwelet,
Stoub enn he skouarn ha mouchet.

Klevet na gwelet na finval,
Hualet 'vel eunn aneval;

Ann de warlerc'h emez pa eaz
Toull he dor he wreg hen kavaz.

Difenn gourenno d'ar Vreiziz,
Difenn d'ar person he iliz.

Pa oe c'hoarvezet ann dra-man,
Oann e Treger o studian.

O studian oannn er golach
'Vid ober ma belegiach;

Eunn den santel vijenn me bet,
Hag eur plac'hik 'n deuz ma dalc'het.

EUR SELL DIWAR LERC'H

Ti ma zad na oa ket pell waz
Euz ann aod don, lec'h garfenn c'hoaz
Klevet o c'hourdrouz ar mor braz.

Ha kichen ann aod ar c'hoajo,
Ed du ha melchon er parko,
Oar kleun ar parko avalo.

Du-hont er geridour huel
D'abarde eur c'hloc'hik santel
'Vid ann anaon a vransell.

D'ar sul goude ann ofern bred
Ann dall oar bazen ar vered
Gane ar werz neve savet.

Gand Annaik hag he c'hoar all
Oar ann dosen sellemp gwechall
Bugale c'hoari mouchik-dall.

Ha da c'houlou-de ouz ar ster
Klevemp o nijal dibreder :
— Per, Per, digor d'ann alc'houeder.

Tro 'pad on bet e ti ma zad,
Ken evuruz oann hag er c'hoad
Ar voualc'h c'houtelle divezad

C'hoaz 'm euz klevet ann estik han
O lenva bemnoz : me na ran
Nemet lenva ive breman.

Tommoc'h ma gwad : meuz peuc'h ebed :
Evel enn eur vro milliget
On me o leski hep sec'hed.

E Ger-Vraz zo trouz ann ifern ;
Aman eo da welet a vern
Tud nec'het o redek 'vel lern.

Hag ar plac'hed enn ho zello
Glaou tan : sant Ervoan r'am miro !
Kunnoc'h a zell merc'hed ma bro.

Ar barzed emaint daou pe dri ;
Evid ar re all n'ouzont hi
Nemet gevier ha lousoni ;

Neuze ho sonio gwastader
Kasinn eur wech d'am barzed ker,
Milin, Luzel ha Kermarker.

Gwel ann Oll-Sent a zo arc'hoaz,
Ar c'hleier 'deu endro : allaz !
Me gav ar c'hleier 've ar c'hlaz.

KAR ANN ANKO

I

Gwelet hoc'h euz enn devalijen
'Barz ann noz teval eur sklerijen ?

Al luc'hed didrouz en noz teval
Zo eunn ine kez o klask eunn all.

Klevet hoc'h euz goude anter-noz,
Pa n' ganer nemed er baradoz ;

Goude anter-noz klewet hoc'h euz,
Nemed enn ifern pa na ye keuz,

Evel eunn diskan klevet gwechall
Eur vouezik truezuz en noz dall ?

Eur vouez-noz o c'houl true, kristen,
Zo kloc'h-gelv eunn ine o tremen.

Evelse eur wech, na larann gaou,
Huel ann dosen, ar ster e traou,

Uz d'ar puns oar ma c'hoaze eno
Me gleviz e traou kar ann Anko :

Ter dro dre ann draouien, ha goude
Diskargaz ar c'har 'traou ar mene,

E traou ar mene pa diskargaz.
Chetu eunn ninsel oar ar ster-braz.

Piou en euz kemeret ma dorn-me
Hag en euz ma zennet ac'hane ?

Sonet kloc'h-gelv, gret ar lizer-man,
Oar dorik ma c'hampr 'm euz skrivet han.

II

Benn eur berr amzer pa vinn maro,
Ra vin kaset da vered ma bro.

Eiz 'deuz sonj euz ma bugalerez
'Vo dougerien, hep gwall chacherez :

Rag n'eo pounner ma c'horf dizec'het
Nag eul loden gaer 'vid ar prenvéd,

Ma c'horf dizec'het, 'vel eur foen
Er c'hrec'h meinek pell euz ann aven.

Ha 'kreiz ar vered me a garfe
Kichen ar groaz ve toullet ma be ;

Ha oar ma c'hroazik hano e-bed
Na bleunio, eur barr ivin broudfed :

'Pad a chomo glaz ann ivin-ze,
Peded, tudo, evit ma ine.

Gant n'a pedo oar ma be grage,
N'euz lenvet hini oar ma bue :

Hep gout d'in m' vize ouz-on glac'har,
Re geuziek vizenn dindan 'nn douar,

Ben eur berr amzer me a gousko
Kichen ar groaz e bered ma bro ;

Uz d'ann iliz goz oar ar c'hloc'h krenn
A sko peb mare d'ar gristenien ;

Oar ar c'hloc'h pa goueo ar morzol,
Boumbel ma c'halon na finvo tol ;

War-dro anter-noz ma sav ar groz,
Glevfed iouc'ha war-dro anter-noz :

—Nemed d'am mamm, malloz oar beb greg!
Ha oar beb merc'h n'a zo kalouek ! —

ANN ANGELUS

Din, din, din... ann *Angelus* :
Mouez ar c'hloc'hik zo klemmuz
D'ann *Angelus*.

Din, din, din... n'e ked ar c'hloc'h
M'euz klevet bemnoz e Roc'h
N'e ken ma c'hloc'h.

Din, din, din... enn Breiz-Izel
'Nn *Angelus* bag hen' vransell
Em Breiz-Izel ?

Gwechall oa gwerz ann Ele
Enn iliz ganemp neuze
Gwerz an Ele

Gwechall, ia, enn amzer goz,
Pa bedenn me deuz ann noz
Enn amzer goz.

Ma c'hoantik m'euz gortoet
Kichen ann dour binniget
M'euz gortoet,

Hag evid eur c'hoarzaden
Em c'have c'hoaz enn arbenn,
Eur c'hoarzaden :

Ke gwestad, oar da zeulio
'Vel eunn 'ne paour m'ielo
Oar da zeulio.

Evit-hi *De profundis*
An da laret 'n eunn iliz
De profundis.

Pegoulz glevinn *din, din, din*
Kloc'hig ar vro 'kana d'in
He *zin, din, din.*

SON AR CHUPERE

Ouz tol oa c'hoaz tud ann eured,
Broudig ann dall p'az eo klevet

Gand he gi ar baleer-bro
O *pateri* ouz ann treuzo :

— Dall ha daonet ! ann aluzon
Az po, m'ar kanez d'imp eur son. —

He skul 'n he zorn gant peb-hini,
Krog ann diskan war leur ann ti.

*
* * *

Skuill ha skuill, ev da ruill ;
Chupere, n'aved re.

Mad e gwin ru d'ar Galloed,
Evel dour red d'al lapoused ;
Chupere 'n euz ar Vretoned.

Breizad a danva chupere
N'ansav da vestr nemet Doue ;
Ha kalz n'e ket Doue 'vit-he

Ken dous eva chupere mel
Ha kemer pokik dimezel :
Diwall a gement-ze zo well.

Biskoaz roue ar Vretoned
Gand ar Saozon n'oa bet trec'het,
Gand ar sec'hed na laran ket.

Eur rum daouzek a varc'heien,
'N ho zouez eur brinzez bleo-melen,
Oant o koania 'n eunn enezen.

Blondinen skuille da eva.
Gwad paün fotaz da genta
Er chupere, 'vid ho skanva.

En eil skullad gwad er-wiber ;
Hag int a-greiz ebato ker
D'en em daga 'vel loened ter.

Gwad eur pore'hel er skullad all :
Ha kerkent int kouet mezo-dal,
Hi o c'hoarzin gant sello fall.

Ha krog en korn-bout ar roue
Sonaz d'ar Saozon... — Hag aboe
Eman Breiz dindan gazel-ge.

Skuill ha skuill, ev da ruill ;
Chupere, n'eved re.

* * *

N'oa ket ar ganoen paket,
'Vel sonerien m'oant sklabeet,

Oant sklabeet dindan ann dol
Gant nao skullad, unan peb tol.

— *Requiescant !* — eme Broudik,
'N eur vond en hent, leun he zac'hik.

KLEMGAN

Pell ouz ar vro a garer eo garo da verwel !
Allaz ! ken pell da guz-heol ha du-hont Breiz-Izel
Ma bro kez Breiz-Izel.

Ar valanek zo ledan 'vel ann oabl da greiz-de,
Lec'h a glemm 'vel anaon ann awel d'abarde
Ann awel abarde.

Dindan eun troad radenen eur gudon oa neiziet,
Kouldri steuet gant kevnid mesk ar gliz alaouret
Ar glizenn alaouret.

Er c'hoajo don 'zo pelloc'h ann noz a zo du-dall ;
Eno 'maint al loened gwe hed ann noz o vlejal,
Hed ann noz o vlejal.

Hag ive tro-pad ann de deuz al liorz d'ar c'hoat
Eman kludet en deillo 'nn evned o vegetal,
Evned o vegetal ;

Evruruz 'vel ann ele diskanont 'peb amzer
Stravillet ann env gant-he 'vel ra bili 'n dour skler,
Bili kouet en dour skler.

Pa save banac'h awel, bemnoz diwar ma dor,
Sellen ar goabr o ruza 'vel listri war ar mor
Al listri war ar mor.

Ebarz iliz ma farouz eo ker ann oviso,
Hag ar c'hleier 'zo skiltruz... Kleier kez, kenavo !
Kleier santel ma bro !

E pevar gorn ar vered a zo savet elen,
Ar groaz zo kuzet e kreiz ouz skouro 'nn ivinen
Skour glaz ann ivinen.

Diwar tachen ar vered gred sklentia ho c'hoari
Hep aoun ebet, bugale, ma hunik da deri,
Gred sklentia ho c'hoari ;

Ha baniel ker ar pardon pa rai ann dro peb be,
Merc'hed kez, na gavfed ket en o zouez ma beme,
Na gavfed ket ma be.

Hag eo gwir zo red d'in-me leuskel ma iaouankiz,
Hep den da oela gan-in, na m' dougen d'ann iliz ?
Siouaz d'am iaouankiz !

Me'garfe c'hoaz eur wechik gwelet ouz kleutar porz
Ti ma mamm o vogedi hag azei 'n he liorz,
Ti ma mamm ! al liorz !

Otro Doue, gwal garo garo, re garo da verwel
Pell ouz ar vro zo karet, kenn pell a Vreiz Izel,
Ma bro kez Breiz-Izel !...

AR MOR-VERC'H

Merc'hed Landreger zo ken koant,
'Vel mizilourio en arc'hant.

Hini velkent reaz al lezen
Evel unan oa stoubinen,

Eul lagad lemm, eunn dornik fresk,
Eur c'horfik mistr evel ar pesk.

E ribl ar mor oa he zi plouz,
Lec'h vije wecho eur gwall drouz,

Ha na den na loen koulskoude,
Hag ann nor digor en ti-ze.

Nemet gand eunn darn ve laret
Ar stoubinen oe diskennet

Evel eur morverc'h er mor glaz
Da c'hoari gand ar pesked braz.

*
* *

Ann amzer neuze oa garo ;
Gand ar Re-C'hlaz ann ilizo.

Nez ann ti plouz d'ann abarde
Gweljent unan bennag ann-he.

'Dalek³ ma stoke d'ann treuzo,
Kleve ar c'hlaz o vond endro,

(War al lestr o koll 'kreiz ar groz
Klev peb-hini kloc'h he baroz) ;

Ma lake eunn troad en ti plouz,
Ar c'hlaz kleve gand ar mordrouz

En iliz Priel, dreist al lenn...
Oll ho zagaz ar stoubinen.

Tri-c'hant ha pemp ha tri-ugent
'N eur bla tremenjont 'tre hi zent.

Dispennet ann ti plouz, lerer
Er vins zo bet kat eur voger

Hag a gase dindan ar mor :
Eur wech ebarz, n'oa nep digor.

*
* *

Ha merc'hed Treger deuz brud fall,
Laket me chans gant tud Bro-C'hall.

LANN-TREGER

Chetu ar c'har-post a Wengamp
Gand he gezek d'ar pevar-lamp.

Deut war ho dor da glask kelo,
'Vel klevont ar brizillono,

Ha tud Pontre ha tud Ar Roc'h :
Drill-drill-drill-drill, daou-ugent kloc'h.

Adarre d'ann hent ar c'har-post,
Pemp a ganfarded ouz he lost;

Na den goude, met dall ar forn.
'Lez ar c'hoat astenne he dorn.

*
* *

O vond neuze gand ann dosen
Eunn tremeniad troaz he benn,

He benn distroaz da welet
Ann hent war-he-lerc'h hed da hed.

Peb tu d'ann hent eunn dastum gwe
Lee'h al laouenan marvaille,

Souezet hennez kavaz penoz
Ann hent braz treuze koajo koz ;

C'hoaz ouz ar c'hleun, 'vel er c'hoajo,
Da dud muntret save kroajo

Pe tro-war-dro c'houez ar spern-gwenn,
'N eur c'hloz sonjaz oa o tremen.

Aman falc'herien 'dren d'ar gleut
Ho falc'h lemme gand eur min treut ;

Hag hi da lampât ar gleut moan,
C'houec'h pe seiz, evit mond da goan ;

Tolet filzier mesk ar melchon
'Barz ann duporl oa en hent don,

Ar potr-kar reaz he dol skourje :
'Nn duporl arok, 'r re-man goude,

Daou ha daou, skourmet ho divrec'h
'War ho c'halon, evel menec'h.

Gand ann dro-gorn p'oz int koachet,
Nemed ann duporl n'oe klevet

Strons ar rojo dre ann hent-kar,
'Vel evit gori sklog ar iar.

Ar sklokerach en eur bellât
Nemed ann awel o c'houillât

Klever hirvouduz, ann awel
A ren dreist ar c'hleunio huel.

* *

Ar re-ze 'n ho bugalerez
D'euz chilaouet hon awel kez,

Pa glemm, pe gelv, pe kan, pe goel,
D'eur vouezik ker o komz henvel,

Er goanv 'vel kimiad ann ine
Ha d'ann han son ar garante,

Biken ar re-ze n'ankouafont
Traouienno Breiz a zo du-hont.

N'e ket c'houaz eunn draouien larfec'h,
Ken tost d'ann envo m'hen gwelfec'h,

Bolz ann env ken izel uz Breiz
Gant goabr evel listri eleiz ;

Ha m'eo chouk ann env ken izel,
A gan ken koantig ann awel,

'Vel ar c'hurun skler ve klevet
Pa dirog ann oabl tost d'ar bed.

Da gement zo Breizad a blij
Mouez ar goabren diwar he nij.

Evuruz ar re 'man ho zi
War douaro ar Vreizidi,

Ho gwele war ann draounien-ze,
Evit gwelio re ann oabl le,

Ar mor gand he gouriz endro
'Vel mamm-goz o luskell ato !

* *

Na sponted ket diwar ho tor
O klevout trouz a tu d'ar mor,

Tud a Lann-Treger, na grened :
Dôn ar mor-ze, garo n'e ket.

Ma fell d'ac'h klevet en od fall
Ar gazez k'hilaz o c'hourinal,

Savet he moue hed ar stered,
Ann eon gwenn-kañ distolet,

Kement a soroc'h hag er c'hoat
Pa stourm ar bleizi 'kreiz ar gwad...

Mond pelloc'h a vanko neuze :
Ho-man eo mor ann drugare.

Nep belek eno 'heuil ar groaz
N'e diskennet lez ar mor braz,

Gând ar stol du, 'n he dorn ar heuz,
Da noui eur vag en he heuz.

Ar mordrouz deu gand ar wagen
'Vit m'eo klemmuz, zo hep anken.

Eur vouezik klevfed' ouz ann noz,
Gwerz eur mesaer war ar roz.

Wecho velkent ve leun ar poul,
Hag ar mor a diskuill eunn houl,

Eunn houlen pe diou losk er vro :
Unan ia bete Pontreo,

Hag heben damdosta d'Ar Roc'h,
Sioul ha klouar, na pelloc'h,

'Vel dre hec'h hun ra eur wregik,
Astennet gant-hi he brec'hik,

Ha dousik-dous 'kreiz ann huvre
A lar hano he c'harante...

* * *

Pa stagaz ar c'har-post e ker
Oa *kouignaoua* 'ti ar c'hleier.

Hag eur c'hloarek diwar he rez,
Bleuriel gant-han, 'vond emez :

— De-mad d'ac'h, hirie ma mammik.
Chetu ho mab da velegik.

D'ar sul goude ar Sakramant
Kanin m'ofern-bred, 'vel po c'hoant. —

Out-han selle 'pad ar c'hloc'had
Eur vere'hig en eur galonad .

— Gwennola gwechall hec'h hano.
Ar baourez biken ne vleunio :

Et he skiant mad gand Doue,
Aboe ma mab zo et ive. —

.

En Breiz, e giz ho-man zo kalz :
Ar Werc'hez ra dai d'ho frealz !

NOZ ANN NEDELEK

Sonet ann ofern anter-noz ;
Ar gristenien et d'ar baroz,
Nemet Iann Kouer zo 'barz ann ti
Hag al loened er marchosi.

En oaled ar c'hev a c'hlaoue,
Ha Iannik Kouer a vorgouske,
Maro ann tan ebarz he gorn,
Alc'houe ar c'hraou gant-han 'n he zorn.

Ann Nedelek p'az e kanet,
A zo breman tro al loened
Da darempred Mabik Jezuz,
Ar gristenien p'int et da guz.

P'e tremenet loened ar vro,
Da vond gant-he d'ann oviso
Zaout Iannik Kouer ho deuz galwet .
Siouaz ! dor ar c'hraou zo serret.

Hag int da hirvoudi 'n ho iez
Ha da vlejal, al loened kez !
A-greiz he hun e savet Kouer
O kredi war-n'han oa al ler.

Da nozvez ar Mabiz Jezuz
Gwelet ar c'hraou oa burzuduz
Sklerijennet 'vel eunn oter,
Hag ann ijen o prezek ker :

— Nemed ann den hag ann tousek
A chom kousket d'ann Nedelek,
Ann ti d'ann noz-ze zo prennet
Gand ann Anko vo digoret.

Klewed : daoust d'ar penn-tiegez !
He dreid' penn a-rog c'hai emez,
Dindan daou-ugent de vo red
Dougen ar penn-ti d'ar vered. —

Ha daou-ugent devez goude,
Gouel ar Chandilour oa neuze,
D'ann oferen-bred et ann oll,
Nemet Iann, potr-ar-ger beb tol.

Eunn droig a re'n he bark braz,
Kloc'h ar *Sanctus* pa daondolaz :
Hag hen da redek oza mern
D'he dud o tond deuz ann ofern.

Med ouz he welet 'n eur park all
Eur c'hoele zo krog da vlejal ;
Ar c'hoele war he lerc'h. Iann Kouer
Oa stok he daou droad ouz ar ger,

P'oe treuzet he gein gant 'tol korn,
Alc'houe ar c'hraou gant-han 'n he zorn,
Hag en ho c'hraou, eme ar vrud,
A vouse'hoarze al loened mud,

HUNVRE

Awalc'h dridra, ma c'halonik !
Taw, paourik kez, kousk ha taw mik...

* *

Kelo 'meuz bet deuz ma e'hoantiz
Zo et eunn devez gand he giz.

Ha war-ma-lerc'h deut d'ar Ger-Vraz
Ouz ma c'hlask pe d'am gwelet c'hoaz.

Tost d'ann iliz, 'vid hi c'hortoz
Oann o vale, 'vel renn bemnez ;

Hag hi da dremen : Doue oar
Eur plac'h a sell ien pe glouar.

Na gir 'tre-omp ; nemet raktal
Kuzaz en iliz 'vel gwechall.

Gortoz oa d'in diwar ann hent :
Mouchet eo d'in Doue ha sent ;

— 37 —

'Boe 'meuz kollet ar garante,
E losket baradoz Doue...

* *

'Vid ann noz-ze oann dihunet
O klevout goel ouz ann oaled,
'Korn ann oaled eunn elik gwenn,
Eunn alc'houez aour en he gerc'hen

M'oar vad alc'houez ar baradoz,
Lec'h a nijaz d'ann anternoz,

Nemet oa deut, 'vit kimiadi,
Eur verc'hik ker evel lili...

* *

Chetu vo ugent bla breman,
'Noz eo maro 'm euz 'nn huvre-man.

Tud vad, p'em kavfed ma-unon,
Vin o lenva d'am anaon ;

N'am dalc'hed ket, m'ac'h euz true :
War zeulio ma dous vin neuze.

SON ANN NEVEZ-AMZER

Moualc'hik-noz, pa glevan da son — o son
A sav ann anken em c'halon ;
'Vel eul lestr war ar mor, d'ann noz — bemnoz
On ma-unan e-kreiz ar groz.

Daro el lanneg ar bleunio, — daro
Gwisket a nevez ar c'hoajo ;
Ar pardonio a zo digor : — digor
Deut 'ta, merc'hed, war doul ho tor.

Ann nevez-amzer e'hoarvezet — abred,
'Man daou ha daou al lapoused
Al lapoused o klask eunn neiz — ho neiz
'Vel er pardon tud iaouank Breiz.

Tomder ann env hag he vammik — mammik
'Meaz he blusken tenn ann evnik ;
Ouz ar ganfarded re garo, — garo
Evnigo, Doue d'ho miro !

Pa vo kresket ho diou-eskel — eskel
'N eur gana tarnijfont huel ;
Al lapoused 'zo da Doue, — 'vel me,
'Vel on dalc'het d'am c'harante.

Ann nevez-amzer zo joaüz — joaüz
Nemed d'ar re karantezuz,
D'ar re 'zo pellet da viken — biken
Ha gwestlet ho daouik zoken.

Taw da c'houistellat, moualc'hik-noz, — bemnoz
N'on ken, siouaz ! ouz hen gortoz ;
'Troc'het e ma nevez-amzer, — a-verr :
N'euz den ouz ma c'hortoz er ger.

IMPRIMERIE

des Éditions et Publications de Paris

14-16, Rue Le Brun, 14-16
